

Kantik Itron Varia Folgoat

great e 1888, gant an ao QUÉRÉ, person Kastellin

BN1-2-024
DISKAN

*Santez Mari, mamm Jezus
Hag hor mamm benniget,
Mil bennoz d'an deiz eürus
M'ho kuelomp kurunet.
Brema petra da c'hortoz
Ila petra da c'houlen
Nemet c'hoaz, r Baradoz
Guelet ho kurunen!*

Itron Varia 'r Folgoat,
Evit ho saludi,
Tud an Arvor, an Argoat,
A zired gant dudi.
Eur gumun lugernus
A lakeer var ho tal;
Hag eur c'helou ken eürus
A ra deomp holl tridal.

Ia, Guerc'hez, Holl e tridomp!
Ha, penaoz ne rafemp?
C'hui zo eur vamm evidomp,
Bikep n'ho tilezfemp.
Ouz Breiz-Izel pa zellit
A bep tu tro var dro
Sklear hag anat e velit
Oc'h Rouanez hor bro.

Ama guechall e yeve
Fur paour, berr a spered,
Goude poania, ne zeske
Netra, kouls lavaret.
Daou c'her: « Ave Maria »,
Setu e holl beden.
Mes n'ehane d'o c'hana
Divar skour e vezen.

Var e vez eul lilien,
Eun deiz, zo divoanet;
Hag en aour, var bep delien,
Lizerennou skrivet;
Peden vad ar zervicher
Ken douget d'ho meuli
Ho pea moulet, mamm deuer,
Var bleun guen al lili.

Goude beza ho pedet
Noz-deiz, en e lochen,
Foll ar c'hoat en deus roet
E, ano d'an dachen;
Hag eleac'h ar bod lili
Hirio 'z eus var e vez
Eur japel gaer, hag enni
C'houi a zo Patrounez.

Hon tud koz gant o c'hizel
O deus dantelezez
Mein galet an ti santel
Zo deoc'h ama savet;
Ha da guzat blonsadur
Merzoliou digristen,
Ni d'hon tro gant plijadur
A brof hon aluzen.

Oc'hpenn, en hor parrezioù
Ho poltred a gavomp,
Hag en hon tiegeziou
Bihan ha braz ho pedomp.
En distro (burzud eürus!)
Ni vel, azioc'h hor penn,
Astennet ho preac'h nerzus
D'hon harpa, d'hon difenn.

Goude a rit, hor buhez-ni
A zo poanius meurbed.
D'al labour hep damanti
Ni rank staga bepred.
Ha goude c'houezez bemdez
Da c'hounid hor bevans,
Ne jom ganeomp ken danvez
Nemet hon esperans!

Kals o deus brasoc'h madou,
Kaeroc'h deskadurez.
Ni hon deus yez hon tadoù;
O feiz, o c'harantez.
Ni a gar, e Breiz-Izel
Hor brezonek, hor feiz,
Koulmet o daou, mamm Zantel,
Gant hoc'h ano e kreiz.

C'hui her goar, ho kurunen
A zeu a bers ar Pab.
Hen eo Tad ar gristenien,
Hen eo Vikel'ho Mab,
Ni n'hellomp nemet pedi,
Hor peden zo dister.
Paz 'z eo nerzus hoc'h hini,
Harpit Kador sant Per.

Bennoz d'hon eskop nevez
En deus ho kurunet.
Dezan ha deomp-ni, Guerc'hez,
Roit ho skoazel hepret.
Ha pa zeulo'ar mare
Da vont da velloc'h bro,
Evit paea deomp ho tle,
Hor c'hurunit d'ho tro.

RESPONT AR VERC'HEZ

Klvet a ran ho peden
Bugale Breiz-Izel;
Ia, rust eo ar venoden;
Ia, tenn eo ar brezel.
Mes na gollit ket fizians:
Dorn Doue ar c'hrenva!
Ha lagad e Brovidans
Zo varnoc'h o para.

Euz*va zu, Breizis fidel,
Ha n'hen dizonjit ket,
Me roio deoc'h va skoazel.
Keit ha ma viot er bed.
Ha pa guitaot ho traonien,
Me c'hoaz, ouz ho kortoz,
A vo gant ho kurunen
Var dreujoù 'r Baradoz.

EVIT KIMIADA

Brema, Guerc'hez benniget,
Ni guita ho tachen,
Gant esper mad eo skuillet
Ho kras en hor c'herc'hen.
Skrivet doun hon anoioù
En ho kalon deuer.
Hag e kreiz hon trubuilhou,
Bezit hon eil Zalver.

Euz hor c'hostez e tale'himp
Sonj euz ar Rouanez,
Iezi, keit ha ma vevimp,
Ni zougo karantez,
Evit ma chomimp ato
E renk he bugale
D'he heul, dre 'n hent ma karo,
Ni boanio da vale.

Amjest braz eo an amzer,
Ar stourmad a zo kriz;
Brezel a reer d'Hor Zalver,
D'e lezen, d'e liz.
Mes, pell da zizesperi,
Sur omp, ni c'hounezo;
Hon dorn e dorn Mari;
Netra n' hon diskaro.



Kantik an ao. Quéré, great evit enori
gouel ar Verc'hez kurunet e 1888, a ro
ga genta c'huac'h kumplad kantik an
ao. Guillou, savet en amzer ar brezel 70).
An diskan ha dek kouplad (ar zeiz di-
veza ha tri all) a oue great gant an ao.
Quéré.